

KIS-371 – Gl. clairance

(GE – 06 11 89)

MELLADOÙ EUS AN DANVEZ GERIADUR AR VEZEKNIEZH

Gl. clairance, clearance. Br. **dizeul** g.-ioù.

Keñver etre tozkas ezvevennañ un danvezenn diouzh ur c'hombod dourennel lavaret hag ar bec'h anezhi er plasma. E-keñver mentawouriezh, ez eo an dizeul rannad un tozkas MT^{-1} dre un ec'honvec'h ML^{-3} , kevatalad enta d'un ec'hongas L^3T^{-1} ; dewerzhed e vez e mililitr dre vunutenn (ml/min).

□ Ar Br. **dizeul** luniet diwar **di+deul** (Kb. **dawl**, sl. RC 38 170, *Mélanges Jubainville* 226, GPC p. 1544) zo bonad pennanvaet ar verb **dizeuliñ** (Kb. **diddoli** "refuse, deprive of, withhold from" ha, dre gemmesk gant **didoli**, "separate, set apart, put asunder, detach") a arveran amañ gant ar ster "barr disrannañ, barr disteurel, barr ezvevennañ". Labour organoù 'zo, evel an avu, al lounezh, eo disrannañ ha disteurel danvezennoù 'zo eus ar gwad. Muzuliet e vez barr ezvevennañ, pe **dizeul**, an organoù-se dre zewerzhañ, er pleustr, an ec'honad gwad a vez peurgarzhed dioutañ an danvezenn da ezvevennañ dindan ur vunutenn. Da skouer, pa lavarar ez eo **dizeul an urea** kement ha 50 ml/min, ez arouezer e vez al lounezhi o peurgarzhañ dre vunutenn un toz urea par d'an hini a zo bezant e-barzh 50 ml gwad.

Gl. clairance rénale. Br. **dizeul lounezhel**.

Keñver etre tozkas troazhañ un danvezenn hag ec'honvec'h an danvezenn-se er gwad : dizeul lounezhel an urea (pe, berroc'h, dizeul an urea) zo, gant an oadour reol, etre 40 ha 80 ml/min.

GERVA BREZHONEK-GALLEK

bec'h g. concentration.

dourennel aa. : *kombod* — compartiment humoral.

ec'hongas g. débit en volume.

ec'honvec'h g. concentration par unité de volume.

tozkas g. débit en masse.